

GRAET MA VIMP GWIR GRISTENIEN EPAD HON HOLL BUHEZ
HA MA VEFOMP EVURUS EN ENVO GANT DOUE !

1. Bretoned ha kristenien, tostaet da glevet
Eur Werz ar c'haeran, eur werz neve zavet;
An danve zo ken kaer, a zo ken burzudus,
Ma lako ho kalonou da dridal evurus.
2. En Eskopti a Dreger ebarz ar C'hoz-Varc'had,
En doa ar Spered-Santel eur Chapel saved-mad,
Hep ra, na pri, na mason, na tœr, na calve;
Pa deu an den n'he c'hichen e wel ar wirione.
3. Nan eus nemet c'houec'h men oc'h ober ar Chapel,
D'ober dezi mogerlou ez eus peder roc'hel,
D'ou all a zo en dœn. P'hou'ta ne gredfe ket
Eo Doue holl C'halloudek en deus anei savet.
4. Er Chapel-man, Kristenien, e peder ar Seiz Sant,
Seiz breur 'oant a renk uhel, tud fur, tud a skiant,
Seiz servichour 'da Zoue, pa oant war an douar,
Seiz difennour evidomp aboue m'emaint er gloar.
5. Ho Skeuden a zo ive, Gwerc'hez, hon Mamm Zantel,
En-kreiz etre ar Seiz Sant. Bezet 'ta hon skoazel !
Ha pa deulou ar Seiz breur evidomp da bedi,
Grwet ma teuy ho Mab Jezuz kerkent d'hon fardoni.
6. Me 'gred penôs, Kristenie, e vefet aketus
Da enori el lec'h man ar Seiz Breur evurus,
Ha da welet ar Chapel pehini a zo groet
Hep ra, na pri, na orzol, hep zikour deniebet.
7. Hag evit heuilh o skoueriou hag ober d'ac'h komprenn
Pegement e sent Doue ouz e zervicherien,
E c'houlennont digantan gouzanv evit e c'hloar
Ar poaniou a deurvezie rei d'ê war an douar.
8. Ar c'hentan eus ar Seiz Sant e oa Maximian,
An eil Mark hag an drived e oa Martinian,
Ar bevare Sant Denez, ha Sant Yan ar pemved,
Ar c'houec'hved Seraffon, Konstantin ar seizved.
9. Gwechal e oa eun den kri, Decius 'oa hanvet,
Impalaer ar fallakren a c'hall fed da gavet;
'Ober 'rê merzeria dre-oll ar gristenien,
Dre ne c'houlent dianzav o Fe hag o c'hredien.
10. En eur gêr hanver Efez e oa neuze Seiz Breur,
D'an amzer ma oa en Rom Decius, Roue-Meur,

Gwerz ar Seiz Sant

- 4 O digemenna reas dre gannadourien,
O klask ober d'eze nac'h Doue hag e lezen.
11. Ar Seiz Breur a lavaras krenn d'ar ganadourien
Ne dianzavchent biken Doue, nag e lezen;
Gwelloc'h e oa d'ê kant gwech dilezel o c'hargou,
Evit bezan trubarded ha nac'h o c'hredennou.
12. An den fallakr, o sonjal trec'hi enne ar Feiz,
A lamm digant ar Seiz Breur o c'hargou hep dale;
Ma talc'hont stard da Jezuz e vefont trubuilhet,
Ha ma nac'hont e lezen e vefont enoret !
13. Mes kaer deus nac'h oute kargou ha peadra,
Kaer en deus lakat anê da glask o zam bara,
Touet o deus holl bezan ar Seiz Merzer,
Kentoc'h evit dianzav Jezuz-Krist, o Zalver !
14. Pan n'en deus ket an den kri gallet donet a-benn
Da zistrei ar Seiz Breur man gant e gannadourien,
Ez eo bet ken kounaret, ma renk dont e-unan
D'o lask ha d' o c'hastian dre gleze ha dre dan.
15. Allaz ! O c'havout a ra ken kuzet en eur c'havern,
Hag, elec'h terri d'eze war an tol o eskern,
E ro urz da vasonad ar c'havern warneze,
Evel pa vijent maro, hag int leun a vuhez !
16. Mes Doue holl-C'halloudek, pehini na lez ket
Oberou groet evitan hep bezn dic'haouet,
A zigasas ar c'housked er c'havern d'ar Seiz Sant
Hag o miras en keit-se dimeus poant ha tourmant?.
17. Rak pa oe bet ar Seiz Sant er ch'avern douaret,
Dre aotreadur Doue e krokchont da gousket :
Seitek vla hag eiz hugent 'oant bet hep dihuni,
P'oe digoret ar c'phavarn en oant kavet enni !
18. Pegen evurus omp-ni, etrezomp, Bretoned,
Dre m'hon deus ken bras tenzor en Parouz ar C'houerc'hed !
Rentomp grasou dan Dreindec : Tad, Mab, Spered-Santel,
Da vezan groet d'ar Seiz Sant, en hon Bro, ar Chapel !

ITRON VARIA GONSOLATION,
HON MAMM DOUS HA MADELEZUZ,
AR C'HOUEC'HADIS A GREIZ KALON,
HO PED D'O REN DAVED JEZUZ ! (Bis)